

Ni er ro déc'h a galon vad,
 Gant conje e mam hag e zad;
 Conje e chereñt hag e liguez,
 Da antren ganec'h en priadelez.

255

Petit Jesus, roue an Cron,
 Da rei dec'h e venediction,
 Ha doc'h asista evel ma eure
 En eured Cana en Galilee.

Conduet eur vuez vat,
 E doujan, Doue erve ho stat,
 Ha goude monet da repos,
 Gant an oelez d'ar Barados.

fin.

Prôn Berrien.

Forc'h e midorc'h, santifia santiforc'h,
 Et eo zacqeta gant e lorc'h.
 an Dremen zo tennet demeus Santimitouch,
 Marichadour patatez hag a ber-milibouch. Amen.

256 Davit all var he crabanou,
 Hag e ckefol eun darn eus an ordrenancon.
 Da genta tout, gannet ar zort,
 Hag e matez a voa tork,
 Hag eus ehy a voa er Houiden,
 A zo bet proaret ganteur podadoubon.

Pedomp brema evit ganneet ar choq,
 Hba yan ar yar pre coll e doq,
 Pere o deus roet evit ofrans dan iliz,
 Eur pousin, eur ehanare, eun eujen hag eus iliz,
 Eur vigodenat degak, eur calendat chifretes,
 Guinis-du d'ober ris, ha ris d'ober pratates,
 An drage evit diminution d'o madou,
 Hag o quantation d'o sechejou.
 Pedomp Doue d'o stogo had'o zistogo,
 Hba do laqat en eur quele-clos in loqo,
 Da foultra ofen eus ar mojeriou,
 Hba da stolat en o rochedou.
 Pedomp breman evit an vtrau man' vtrau,

O devez bet laeret ar flous eus ar choajou, ²⁵⁷
 ar brug hag ar framboez, al lux, ar chore-veñ,
 ha calz eus a draou all ousspèn.
 Pedit evitunan a voa pignet,
 En beg eus veen, na voe poulsset,
 Hag en devoa Voujet pignat daou droata,
 Huelloc'h vit ar beg, na daou dan traon gant stae.
 Pignet a voa er beg, mes coet eo dan traou,
 Neus laeret in manus, vel ar charje mignañ.
 Hag o tisgen dan traon gant calz eus a estlam,
 Et gallout bale eon, ezeo bet chonet eam.
 Pedomp brema evit un orzic'hs eus an baros-ma,
 A zo eto en Greger, a lavar, da Stoupa;
 Pedomp Doue ma tremeno ar pont spern,
 Goul miliget, gercouls ha pont ar vern.
 Ha na vent pignet var ar mene,
 O devo eun tamic skrete.
 Pedomp c'hoas evit Ervoan ar scornet,
 En eus bogat deureg, gante fri voe berset,

258 20 èt ive da Stoupa en Greg'es,
 Gant Mbarc'h-Hamon ha boutou ber.
 Doue den gasso ha den digasso,
 Dilouer ha divouteg, ha divrago de vro.
 Gras de g'eim da iza e rochet,
 Ma hayo en noas da redep.

Pedomp c'hoas vit eur gant bras,
 Hantet Sant Babivoc, den bras, ma voe biseor,
 Emes voa eur pot fin, vit ma voa lunatig,
 Sac debri re'n esqern hag e leze ar chig.
 Clasget e voa tad gant ar forc'h,
 Da foultra'n esqern en e gorf.
 Hag e voe forc'het ha diforc'het,
 Gen a deue seisgant diaoul de' quelet.

Panez ar Person eur lanneuz,
 20 èt gant laer, n'ouzer get peuz,
 O deus antreet en e gampchou,
 Ha caket en e gabinejou,
 Casset gante eur boutou preñ,

a vije gant an strou, va lare e usern. 259
 Peursuya en olage e gichen e vele,
 Da servich da bod-cam, p'en dije eun uore.
 Eur plachic coant ha fresq, avoagantan enty,
 Cathel ar Gouillouren a halvet anezi,
 A drouse' losten var e feñ,
 Hag a stote er gavallen.
 Chwas e leres brema e bars er scrit,
 Gement hini a achap, peursuya aya quit.
 Abe a zo mab ena da Izabel ar Vrach,
 Dibot, me a gred din, assur em anafach.
 Abe zo niz da yven ar Vris-du,
 A ra ar brava tout brigorien gant guinis-du.
 A ra cafe eb suer gant un tam colo gerch,
 Hag a ra d'ar merchet direct var va berch.
 Eir nosvez zo nemeus get courset,
 Hag hini va zaoulagad ur moment digoret,
 Gant ar choer demeus va trailla,
 Hag all laou demeus va trailla.

260. Choen du, ^{ha}choen goen, ha choen baill;
 En diavoulou-màn eo am draill.
 Ne ar merchet ev ar goassa,
 ethe zo a procs a g'ement-ma.
 En de-all e trespisunan gant vadorn,
 Hag an tam-ar foeldor a voa born,
 Ha me mont ganti da di eun Doctor medecin,
 Haunt Parafaragaramus-Diafoerus-Merlin,
 Ha me e lagat war an douer,
 Vetur y o scillat etre o diouar.
 Hag an hini goz comans da voela,
 Hag ar vreg a deuas da zispaga
 Penn milibouch, deus pegg e dal,
 Hag o craft en eur plas all.
 Gerez, rézin, avalou roaz,
 an drage a blize dar goaz;
 ethe Nbari Franseja a voar peg tam
 a blich muya da verch he nam.
 Pon eur pedet evit an dud,

Pedomp breman evit al loened mud: 261
 Pedomp evit ar brinig bag ar rigadec,
 Hag evit ar bigornet, ma crespint gant avel,
 Evit ar pesget ~~bir~~, evit ar pesget ber,
 A zo war bord an od, hag demeure ar reyer.
 Piou benag en defe clêvet enep tu,
 Comez eus eus cholle. bris ha du,
 Dianget creñ abaoe dech,
 A abarchante da ryan glecth,
 Absolu e ranger e gacout,
 Da ober loeyou bras d'ar zaout.
 Er siyun man nager er zivren all,
 Neus gouel ebet na mat na fall,
 A gement a rae coll ouzvec'h,
 Ha choui a entent, pennou moe'h?
 Gouel Bigornic zo demercher,
 Mes casset eo da zergoener,
 Evit ma challoz pesgetaer,
 George e draou egis eul laer,

262. Evit va chomper Pieres ar ilouez,
 A dek chareat din eur fouldren garad plouz
 Bea zo brema promessa a briedelez
 Etre eur choublic yaouanq a ya da ober oelez,
 Hanauet Per-mistiflor-seladon Boutebars,
 Ha mare-yan-minidous-kippeta-damer-hars.
 Bea zo choas eur bromessa a briedelez,
 Etre goude eur g'inivelez,
 Etre Lucas-Mari Dagorn,
 Ha gileta-gannet ar Chorn.
 Bea zo pevit echui en oll,
 Promesse entre daou'gorz foll,
 Hanauet zeromic genta m'allo,
 Ha dichibonic genta ma trappo.

Prou benac a voefe eun ampechamant benac,
 War ar piniñow-man, pe en mic pe en mac,
 A zo oblijet da zont da benifiet,
 Dindan boan da veza daouet.

Ancouët em boa la varet deñh disub,

C'houi oll am zelav, penne mui,
 Penos gan-zourden. Pauch an Berch's,
 En deves roet dech' trivac'h palevarz gerch.
 Eit beza digofeb e verch. amen.

263

Compliment Vol.

Abe o Dupli, compagneuz abresta din oc'han,
 Eit ma parlantio breman en ho-prezanc,
 Gant honor d'o yechet me a deu da efan,
 Hag a beuz ar Greg-yaouang en ho trugarecan.
 Po cheus bet ar saderz de bean asistet
 En deves a hirie ebar en e. haureth;
 Hag eit c'ch' oblija ec'h erin davantach
 Da yechet nep so roet gant Doue dei eit partach.
 Do yechet ive, Greg-yaouang, eusa beuz kopried,
 Doue da rei dech' ar c'hrac, den em garvat partet,
 Ha da rei dech' er bed-mañ gement a souhetet,
 Abe a regot ma vezo oc'h oll dezirion exaset.